

# TAMM HA TAMM E SAV AR FULOR E DIWAN !

Abae 40 vloaz n'eus ket bet tamm araokadenn ebet koulz lâret, chom a ra bresk-tre rouedad Diwan daoust dezhañ skoliata tost da 5000 den eus ar skol-vamm betek ar vachelouriezh. Ha petra a vez rebechet ouzh Diwan ? Ar yezh an hini eo ha n'eo ket mann ebet all. Un torfed eo war a-seblant kelenn e brezhoneg, e euskareg, katalaneg hag all e bro an unyezhegezh c'halleg.

Perak ? Peogwir n'int ket deuet a-benn da renkañ ar yezhoù-se, hag ar brezhoneg evit pezh a sell diouzhomp, e-barzh levrioù istor ar grenn-amzer, daoust d'ar strivoù o deus graet en ugentvet kantvet betek hiziv evit lazhañ an holl parlantoù disheñvel, istor o fobloù hag o doareoù da vevañ. C'hwitet an taol siwazh dezho, ar vretoneg a fell dezho miret o yezh koulz hag o bro !

Macron ne ra ket fouter kaer deus hor yezh, deus hor bro ha deus hon fobl. Deuet eo da Vreizh da gaozeal deus ekonomiezh, an aerbôrzhoù, an hentoù hag all. Ar brezhoneg ? ur gerig metken ha mat pell 'zo. Kenavo ha yec'hed mat !

N'en deus ket komprenet hon doa c'hoant ni reiñ ur statud d'hor yezh, kaout ar gwir da vezañ skoliataet en hor yezh, da skoliata hor bugale didrabas en hon yezh, bevañ digemplez en hon c'hantved e brezhoneg, digor d'ar bed. Ha n'eo ket e dilennidi hag a servijo deomp, ken feal int ouzh o mistr. Randonet e vez deomp alies hag e rankomp kaout fiziañs, gortoz, emaint o selaou hag oc'h ober o seizh gwellañ evit mad ar bobl. Kaoc'h gante !

Dre chañs e chom tud yaouank mennet o deus komprenet mat ha ne oa nemet un doare d'ober evit difenn hon gwirioù : an disujidigezh an hini eo ha n'eo ket goulenn an aluzenn digant an aotroù prezidant peotramant an aotroù Ferrand pe An Drian. Henn graet o deus. Tremenet o deus o arnodenn skiantoù e brezhoneg hep an aotre, ar matematik evit al liseidi hag an SVD evit ar vreved. N'o deus ket gortozet e vefe lâret ya dezho, henn graet o deus.

Ha petra eo bet respont Bro-C'hall ? Nac'hañ ha kas ensellerien da viret ouzh ar gelennerien gouest ha prest d'henn ober da difaziañ o c'hopennoù.

Reutiñ a ra Bro-C'hall. Deomp ni eo bremañ da dremen ar pont ha da vont pelloc'h. N'eus ket nemet un doare da vont war-raok, kaout ur statud ofisiel evit hor yezh. Ha ret e vo stourm evit-se kar ne vo ket roet deomp, tapet e vo ganeomp ha setu tout. Ar c'hallaoued o devez ar gwir da arnodiñ en o yezh desket dezhe er skol? Ar memes gwirioù a rankomp kaout ! Hag evit an holl zañveziou. Soutenomp ar re yaouank kalonnek o deus kredet henn ober. Kemeromp hon gwirioù ni-hon-unan ha n'eo ket goulenn digant Bro-C'hall ar bruzhunoù o doa roet d'an euskariz. Bezomp disuj ni ivez. Ar re yaouank o deus digoret un erv, deomp-ni eo da heuliañ o skouer ha da ambrougañ anezho betek an trec'h. Tremenomp an holl ac'hanomp gouest d'henn ober ar bacho pe ar vreved e brezhoneg ar bloaz o tont.

N'eus ket mann ebet da c'hortoz digant ar Stad C'hall, hag e-giz ma lâre Youn Bras : *les droits qu'on a ça se demande pas, les droits qu'on a on les prendra !*

Trugarez d'ar re yaouank, tennomp gounid eus o emzalc'h kalonek ha kendalc'homp ar stourm evit hor gwirioù !

**BREZHONEG  
EUS EUSA**



**YEZH OFISIEL  
DA GLISON !**



[breizhistance.nsh@gmail.com](mailto:breizhistance.nsh@gmail.com)



[breizhistance.dieubhaeskialour](https://www.facebook.com/breizhistance)



<https://twitter.com/breizhistance>